



G U E R Z

Var sujet eur femelen erruet intanvez
gant pevar Bugel

Var ton : *Cantic ar burete*

Ni o supli tud devot, deut da silaou a galon,
Ur c'hantic truezus, a doucho ho calon,
A zo grèt d'eun intanvez demeus a Vreiz-Izel,
O qimardi oc'h e mab partiet d'ar brezel,

Qement a gleo ar vers-mâ hag a rei reflexion,
A zo crissoc'h vit eun tigr hac evit il leon,
Ma ne deu da ouela pa entento e len,
A el donet da sonjal ne deo get eur guir gristen.

Dreindet santel, prosternet dirazoc'h d'an daoulin
Me ho pet rei sicour d'ho servicher indign,
Va speret a zo fragil, ha va studi izel,
Velec a c'houjennan ouzoc'h, Dreindet santel.

Guerc'hez gloriuz Vari, deoc'h, en em adressan,
Obtenit d'in ar memoar evit allout riman,
Pa gomprenan ar sujet a ra din scuill daelou,
Mé gret e vezo mantret oll qement e c'hlevo.

Cruelloc'h e zomp erru evit tirantet,
Pere lacas d'ar maro hor Zalver benniget,
Ne zeus tam humanite etouez ar gristenien;
E zit da velet ractal eus a ze ar breven.

Me gomz euz eur femelen euz a escopti Dol
A voa manet invez, e hano Anna Bol.
Pevar euz a vugale a chom gant ar vrec-se
N'oa qet c'hoas achu ar pemp bloas ar c'hossa a née.

E daou yaouanka a voa n'o guelet langissant,
Somjomp ebars er vizer hac ebars en tourmant,
E deyeus bet ar vreg-man gant e bugaligou,
Hep cavet neb tam sicour digant den euz ar vro.

Qement tam meubl a voa a verzas prontamant,
Evit allout rei souten d'e fevar innosant;
E zamouigou dillat prest goude a verzas ;
Truezus e voa e guelet cazi ebars en noas.

Breman var eun tamic plous en eur c'horn euz an ty,
E reng monet da repos e bugale hac hi,
E daou buguel langissant a zo e gant Doue,
Hac hi chom paritic qerqent var e guele.

E mab hena a lavar : me ia da zervichi,
Ha qement a c'honezign vo vit ho soulaji.
Lavaret a ra d'e vreure lezsoign diouz hor mamgez
Hac hit da glasq dei tamou bouet, ha no poketa vez.

He mab hena-neus cavet eur gondition vad,
Mes qemet a choumez a laqe en dillat ;
D'ar gloar ha d'ar vanite ez eo en em livret,
Ne sonje qet en e vam var e guele chommet.

E mabic anter-hena a voa ganti chommet ;
Hac a iea bembdez en dro da glasq dei tamou bouet,
Soigni re e vam bémde. ha goalc'hi e dillat
Ema eo guir melezcour ar vugaligou vat.

E mab hena¹ voe en oad da denna d'ar billet,
Mes dre m'oa mab intanvez e zeo bet exentet
E vreur, eur blavez goude, en deves bet tennet
D'accomplissa arglac'har an numeroizel en deus bet

Bremon e retourn d'ar ger gant eur galon mantret
P'eru e qichen e vam eals daelou n'eus scuiliet,
Va mamic paour, 'emezan, petra refot breman,
Me meus numero izel hac a renq partia.

E vamic paour er c'honsol dre comzou dous meur-
Va hugel qez emezi, en em gonformi zo ret : [bet,
Bezit propr a den honest, grit er vad ho tever,
Ha me a bedo Doue d'an c'honsoli er ger.

Lavaret a ra d'he vam da gaout va breur me ia,
Vit e bedi er veach qent evit partial,
Da rei deoc'h un dra benac ur vechic en amzer,
D'ho soulaji va mam baour, ebars en ho mizer.

Peru e qichen e vreur, e lavarás dezan,
Me meuz, bet eur billet du, hag a renc partial,
Ho pedi a ran, va breur qes, da rei un dra benac
Da soulaji or mam baour, a zo qer miserabl!

E vreur a respont dezan : na zeu qet var va zo
D'interrompi ac'hanon gant da finesseaou ;
Qentoc'h evit da gredi, me c'houlén bea ractal
Rentet amâ var ar plas bouzar ha mud ha dall,

Accordet e voa dezan pez en doa goulennet,
Rentet eo dall ha bouzar, ar gomz en deus collet,
Rentet e zeo malheurus betec fin e zeyou
Evit e bunisa deuz e voal proposiou.

E vreur evel meur guélas lar er stad-se rentet
A zo retournet d'ar ger hac e galon mantret
Va breur eo ar maleürussa a gement zo er vro,
Demeus eur seurt accidant Doue d'hon preservo.

Dal ma meus lavaret dean rei un dra benañet,
D'ho zoulagi va mam baour : en coler è zeo ét ;
Goulennet er devez bea bouzar ha dall ha mud ;
Bet en devez : e c'houlen digant crouer an dud.

E vam a lavar dean : na veles qent bet,
Done a vizericord da rei did ar gullet,
Gouzout a rit, va bugel Doue zo eun tad mad ;
Hac a bardon d'ar pec'her demeuz a galon vad.

Pa voa ar vam dezolet d'ar bugel o prezeg
Eur jandarm ebars en ti a zo bet antreet,
Do rei dean e vulten da partial ractal,
Ema zo bet deo o daou an diveza glac'har.

Ar vam baour oll desolet a lavar d'he bugel
Deus c'hoas etre va divrac'h eur vech gen'vit
En em boqat aravjont en eil hac eguile. (mervel
Ranna reje ar galon a glevje aneze.

Ar bugel-man desolet a lavar de vam gez :
Bet oun o clasq deoc'h siccur ebarz en amezegz ;
A boan euz va zelaou ha priuset va c'hlevet
Evelse, va mamic qez, c'hui vo ambandonnet.

E vam a lavar dean ; partiit va bugel,
Ha va lest en gloar Doue . . . ret a vezo mervel,
Serrit an nor var va c'hein a cassit an alc'hoë,
En eur c'horn eus an ilis eur c'hetot goude ze,

Qestion e voa breman deo d'an em separi ;
Pitoyabl e voa clevet ar c'hri a voa en ti,
Adieu dech, va mamic paour, a lavar ar bugel qez.
Ranna a ra e galon pa voa e vont er mez.

Alc'hoezet en deuz an nor var e vam langissant.
Mont a ra gant an alc'hoë d'an ilis prontamant,
Laqat eure anean var gornic an auter ;
Aze e mean me eur c'havo, ma tistroan d'ar ger.

Stoui ra var e zaolin en ilis benniget ;
Goulen a ra ur menat digant Salver ar bet ;
Accordit din, va Doue, ma teuin da velet,
Enterri va mamic paour pa vezo decedet.

Cetu-en ta partiet da vonet dan arme,
E vamic paour a varvaz pemzec devez goude,
Ar c'hleyer euz ar barez a zon dezi glazou,
Hac a gontinu noz deiz eb caout den var o zro.

Accordet e voe dean pez en doa goulennet,
Anter gant leo dez ar ger ar c'hleyer en eus clevet,
Lavaret ra de gabiten : va mamic paour zo maro,
Me gleo patant ar c'hleyer o son dezi glazou.

E gabiten a lavar : eur miracl bras e ve
Clevet cleyer ho parres, nanter cant a leo nee,
Lavaret a ra de gabiten qimerit eun tam fe,
Ha c'houi glevo anezo aman qercou'z a me.

E gabiten a lavar : me o c'hleo coulz a te ;
Me royo dit, va mignon, breman zouden da gonje
Ma zi d'ar ger da velet enterri da vam gez,
Rac gout a ran da galon zo en trididigez,

P'en devoa bet e gonje e vale nos ha de.
Errnout a ra er ger hep na voa pell dale ;
Monet a ra d'en llis, ma stou var e zaoulin,
Da drugarecat Doue d'eus e c'hraçou divin.

Pa yoe echu e beden e gemer an alc'hoë,
A dal ma tigor an nbr e sell ouz ar guele,
Ma kave e vam baour maro, varni en em daolas.
Gant ar glac'h en devoa e galon a rannas.

An nor voa chomet digor, tud a zo antreet
Ma cavyon an né o daou var ar plous decedet
Monet a rejont ractal da gaout ar person,
Evit annonsi dezan an dezolasion

Ar person ro lincerriou evit ho liena,
Hac a bed ive an dud da zont d'ho assista,
Enterret e voent neuze gant peb soleunite,
Laçet o daou assembles e bars er memes bez

Guelet o c'heus va breuder portrait eur bugel mad
Accordet e voe dèzan gant Doue e venad
Heuillet en devez bepret Gourc'hemennou Doue
Qemerit en evit squer me ho pet bugale.





NOUËL

Me o supli, braz ha bian,
Da bresta oc'h assistans,
Da zilaou kana Nouël,
Gant joa hag rejouissans,
Öll dorjou ar baradoz,
Ha zo breman digored,
Gant eur prins bras Emmanuel,
An eil ferson deus an Dreinded.

Pa bec'hez hon tad kenta Adam,
Da derri lezen Doue,
Oä serret dor ar baradoz,
Ouzomp oll e vugale,
Mez Jesus, gant truez ouzomp,
Zo diskennet deuz an ee,
Zo en em grät den evidomp,
Meulomp oll e garantez.

Pa ia sant Joseph hag ar Verc'hez,
Da Betleem, da repui,
Gant eun avis beza lojet,
Gant unan bennag enni,
Mez siouaz, int bet refusët,
Gant kement a oa e kear.
Oh ! pebez tristidigez,
E doa Mam ar Salver.

Sant Joseph gant peb divinite,
A lavaras da Vari,
Mari, na mar gellit bale,
Setu aoun e mechossi,
Fors pegen kriz vo an amzer,
Evit tremen eun nosvez,
Mari na mar gellit bale,
E rekourfomp on buez.

Var dro anteroz er bloaz-se,
Eur mabig a zo ganet,
An oll Elet d'euz an envou,
D'an douar zo diskennet,
Hac o d'euz partout annonsel,
Partout dre ar c'hampagnou,
Deuit pastor ha pastorezet,
Da adori an Aoutrou.

Eur bloavez mad ha souhetant,
Demeuz a greiz va c'halon,
Ouspen e suplian Jesus,
Da rei he venedicsion,
Var ho tud ha yar ho loened.
Da re goz prosperite,
Avantur vad d'ho tud iaouanc,
Hag ar baradoz goude.

FIN